

Tornaodoù Mhothair

Kement a draoù zo bet kontet diwar-benn an tasman-toù, ar spesoù hag ar gorriganed a bep seurt deuet eus ar bed all ma ne gredan ket kregiñ gant ma istor. Gwechall gozh e veze gwelet traoù... hag ar gontadenn da gomañs : ur wech e oa... Ya, gwechall gozh e veze gwelet traoù. Met hiziv an deiz ? Padal n'eus ket eus an amzer er bed all, gouzout a ouzit n'eus ket anezhi. Ar pezh a c'hoarveze gwechall a zlefe degouezhout bremañ c'hoazh neuze... Hag e ra, lennit kentoc'h !

Seizh vloaz zo e oan o vakañsiñ en Iwerzhon, en Bhoireann, bro zigenvez he menezioù mein heñvel ouzh krugelloù divent. E Burren, hervez Cromwell, n'eus gwezenn ebet da grougañ un den na dour a-walc'h d'e veuziñ. Dour a-walc'h a oa en devezh-se a viz Gouere koulskoude. Glav-pil a ziruilhe abaoe tarzh an deiz. Diseblant ouzh ar glav e oa deñved o fennoù du o peuriñ ar geot treut a greske rouez a bep tu d'an hent strizh. Bleinañ a raen goustadik. Treuzet bourc'h Baile Uí Bheacháin ganin ez gant an hent jilgamm ha digompez

a gas da zDùlainn a-hed an aod. D'an abardaez ez eas un heol lent war wel etre div gogusenn. Ken buan all e tispakas an oabl. Ar mor rust a yae e wagennoù a-benn ar c'herreg en ur strinkañ eon. Dindan bannoù an heol o parañ warni e lufre al leur glebiet dirak ma gwetur.

Degouezhout a ris e Doolin e fin an abardaez. Dùlainn, kêriadenn ar sonerien, he zier bihan strewet a-vil-vern war al lanneier, he zri fub mil anavezet. Diskenn a ris betek an aod gant ar wenodenn nevez teret. Amzer kavout ur "bod ha boued" ha me d'an davarn ! Leun-chouk e oa ti Ó Connors daoust ma ne oa ket seizh eur c'hoazh. Tapout a ris tostaat ouzh an daol-gont ha lakaat ma divrec'h warni evit goulenn digant ar perc'henn, pres war e c'horre, e vefe tennet ur pintad Guinness din. Ne 'm boa ket echu ma frazenn ma oa ma amezeg o treiñ e benn war ma zu hag eñ da doullañ kaoz ganin, kurius evel ur marmouz.

— Daet oc'h da vizitañ ar vro neu'n ? a c'houlennas e saozneg yod.

— Ya, o paouez arru 'maon, emezon e saozneg saout.

Hennezh a oa ur pesketaer kozh, hgozik dek vloaz ha tri-ugent anezhañ, oc'h abuziñ e amzer en ostalerioù pa veze re fall an amzer. C'hoarzhin a rae dizehan ha diabeg, leizh e c'henoù dizant, e zremm skarnilet ha roufennet o sklêrijennañ abalamour d'ar gwerennadoù wiski a yae gantañ.

— 'Pezh zo d'o'r amañ eo mont da dornaodoù Mhothair, eme ar pesketaer, ar re uhelañ deus Iwerzhon, ha kaer-'bominapl eo ar gwel war ar mor ha war ar maezioù tro-war-dro. Met ret eo diwall rak 'wechoù 'vez gwel't traoù...

— Traoù ? Peseurt traoù ?

— Traoù... fei' n'int ket traoù just a-walc'h... P'ra din-

me... Tud kentoc'h. Tud int ha n'int ket tud.

— 'Gomprenan ket. Ma n'int na traoù na tud, piv int ?

— Fei', tud int met n'int ket kig ha gwad eveldomp ma 'feus c'hoant... N'eo ket brav kaozeal deus an traoù-se, pec'hed eo !

Ar paotr kozh ne c'hoarzhe ket ken ha chom a reas dilavar, evel pa vefe war-nes diskuliañ ur sekred spontus. Dedennet gant e istor e klaskis e vroudañ :

— Ha neu'n, p'ra 'c'hoari gant an dud-se ? Me 'garfe goût a-walc'h 'vat !... Met 'po ket banne all 'bet, matre'n 'vefe aesoc'h kontañ ho istor war-lerc'h ?

— Bo... Met n'eo ket un istor, se zo gwir Bater 'pezha a gontan... Setu, gwechall 'lâre an dud 'faote ket kaozeal diwar-benn re ar bed all pugur 'teuent raktal davedoc'h ha ne veze ket brav 'n om ga'out gante !

— Ar bed all ?

Kerkent ha ma voe diskennet e werennad dezhañ e lonkas anezhi en un tenn a-raok adstagañ gant e gaoz.

— Ya, ar bed all, er C'hornôg, du-hont 'mañ ar bed all, war un enezenn pe dindan ar mor, piv 'oar ? Ennañ zo merc'hed koant o chom hag a zo moaien dezhe treiñ e laboused evit dont da gerc'hat paotred yaouank er bed-mañ, setu... Ma, dre forzh flapañ 'teu sec'hed din, ur werennad Paddy 'yelo ganin c'hoazh. Ha te, p'ra 'fo ma faotr ?

Oc'h ober goap ouzhin e oa ar pesketaer, sur ha n'eo ket marteze. Merc'hed o treiñ e laboused ? Ha perak pas ur vandennad korrganed o tañsal ar jig e kreizig-kreiz al lann dindan al loargann, war ar marc'had ? Hegredik eo an douristed ha seurt mojennoù a blij dezhe o c'hlevet,

gwir eo. Iwerzhon zo liv ar c'hevrin hag ar marzherezh warni, re wir eo, met arabat mont re bell ganti memes tra, n'eo nemet folkloraj a-benn ar fin.

— Un dra all c'hoazh, eme ar gaouier kozh en ur reiñ ma fintad din, bep bloaz e c'hoarvez d'unan bennak kouezhañ deus an tornaodoù ba'r mor, bountet gant 'n avel pe c'hoazh 'blam 'oa o vale re dost d'ar bord, hervez. 'Gav ket din la' se eo ar gaoz. Aet int ga' tud ar bed all ha setu tout !

— Me zo sur 'mañ ar wirionez ganeoc'h, tad-kozh, a respontis dezhañ hep krediñ ur ger er pezh a oa o paouez lavaret din.

Lipat a ris ur gargadennad bier du mesket gant eon diennek da droc'hañ gant ur gontell. Vad a reas din !

Ar sonerien a oa o vont en o c'hoazez war ar bankoù dalc'het a-ratozh evite. Dek munutenn dezhe da doniañ o binvioù ha da riñsat o banneoù a-raok ma krogjont da seniñ. Lusk ar *reel* a lakaas an arvesterien da strakal o daouarn. Lopañ a rae o zreid war al leur hag int da ganañ a-bouez o fenn. Ne oan ket mui o selaou komzoù diboell an hini kozh ken sachet a oa ma evezh gant ar sonerezh hag ar cholori a rene er sal. Kement ha glebiañ ma c'horzailhenn e pakis ur pintad all hag unan all da vont d'e heul. Tro-dro hanternoz e oa poent-bras din mont da gludañ, ront ma botoù. Fresk e oa an aer er-maez hag an avel a gase blaz ar fru gantañ a-varradoù skañv. Ar mor a hiboude e werz du-se, war-du an tornaodoù. Gwerz ar bed all marteze ? Ne rae forzh. « Gwir pe gaou, me a yay da welet 'benn arc'hoazh, » emezon-me en ur huchal a-benn d'an avel.

ganin. Sevel a ris diwar ma gwele ha tennañ rideozioù ma c'hambr. Deiz anezhi hag an amzer a oa feson vray ganti : boull e oa an oabl hag an heol splann a drellas ma daoulagad pikous. Soubet ma c'hig ha gwisket ma dilhad ganin e tiskennis gant ar sklalieroù da gaout ma lein : vioù fritet, bacon ha gwastilli graet er gêr, soft-kont. Peadra da vagañ ur ribitailh a vugale deuet du gant an naon pe da gas kuit ma c'halondev da nebeutañ. Ne vanis ket da gontañ kaoz gant an ostizez : floupañ evel ur bleiz ha dao d'an hent !

Dek kilometr bennak a zo etre Dúlainn ha tornaodoù Mhothair. Ne voen ket pell o tegouezhout eno daoust d'an hent kammigellet ha ribin-diribin. Souezhet-mik e voen en ur vont da barkañ ma c'harr war ar parklec'h didud : goloet gant ul latar stank e oa an tornaodoù ken ma ne wele ket an den dek metr dirazañ. Pebezh kemm etre Doolin hag amañ ! « Ha pa vefe erc'h du ez afen di memes tra, » emezon-me. War ma fouezig e pignis gant ar wenodenn bri etrezek tour Ó Brien, diwel evit poent. A-gleiz din e trouze ha kroze ar mor. Gouelini a skiltre a-us da'm fenn evit en em heñchañ el latar an eil re gant ar re all moarvat. O kantreal etre hun ha dihun e oa ma spered pa glevis ur son sklintin o tont eus ur c'hleger pellikoc'h war ribl ar wenodenn. Tostaat a ris. Ur plac'h yaouank a oa aze e-giz-se, o seniñ gant he zelenn, en he c'hoazez war ur badell. Mont a ris daveti didrouz. Ne gredis ket komz outi ken sorbet e tiskoueze bezañ gant he sonerezh. Redek a rae he bizied moan war gerdin he benveg, ouzh o spinañ hag ouzh o fiñsañ, da deurel tonioù heson a voe bamet ma divskouarn gante. O seniñ e oa, he fenn stouet-skañv war he zelenn harpet ouzh he skoaz. He blev ruz a wagenne dousik gant fiñvadennoù

he c'horf a-lusk gant ar sonerezh. He blev ruz a zibune o c'huchennadoù flimin a-hed he c'hein betek stekiñ ouzh ar badell. Div blezhenn plañsonet en-dro d'he fenn a yae d'ober ur gurunenn dezhi. Dindan he sae wenn a ziskenne betek he zreid noazh e tivinis he c'horf mistr ha stummet-kaer. Chom a ris boud oc'h arvestiñ he c'hened, dic'houest da zistripañ an disterañ poz. A-viskoazh e oan bet o klask war-lerc'h ur plac'h evelti hag hi amañ dirazon, kenedusoc'h c'hoazh eget ne 'm bije gellet hunvreal.

Pasaat a ris evit merkañ ma bezañs dezhi. Ne reas ket van ouzhin, he fenn alaouret stouet war he zelenn. Goude ul lajadig e troas he dremm seder etrezek ennon en ur zerc'hel da seniñ. Hec'h enebañs morlivet a oa dezhi daoulagad wer-mouk heñvel ouzh div lenn deñval ha don e-kreiz un dachenn erc'h. He daoulagad wer-mouk a oa o parañ warnon. Mousc'hoarzhin a reas ouzhin. Ne oan ket evit tennañ lagad ebet diwarni. Kregiñ a reas da ganañ ur son velkonius, ur werz trist, hengounel marteze, gant he mouezh flour ha fromus, he bizied o redek en-dro war he zelenn. Lammat a rae ma c'halon ha strafuilhet e oa ma spered. Dindan gazel-ge ganti e oan ken ne c'hellen ket mui na fiñval na bale. Seniñ a reas he c'hanenn betek penn ha da c'houde e komzas ouzhin... e gouezeleg ! Ne gomprenis mann evel-just. Pa verzhas ma zres alvaonet e klaskas distagañ he frazenn e saozneg. A-vec'h dezhi bezañ digoret he genoù ma klevjomp ur vouezh c'harv ha fuloret o tarzhañ a-dreñv deomp :

— *Avec ce putain de brouillard, y a pas moyen de prendre une photo, merde, chier !*

Tro kein a ris da c'houzout peseurt leue-dour en doe kredet hon direnkañ gant e vlejadenn. Un tammig ize-loc'h trema ar mor e oa daou dourist gall, ur vaouez hag

ur paotr, daou bried moarvat. Ar paotr, deuet d'an oad ha kofek, gwisket gant ur polo ha gant bragoù-berr. War e dor tev, ur pezh mell luc'hskeudennerez dalc'het gant ul las lêr en-dro d'e c'houzoug, hag a oa dezhi ur zoum bras ha hir-kenañ evel ul lost du. Ar paotr, hegazet ken e oa, a oa o klask reizhañ e vistrak evit tennañ poltred e wreg. Honnezh, en he sav daou vetrad dirak an torrod, a oa oc'h ober ardoù, paket well-wazh en ur sae fleuriet, gant al lart ma oa, lartoc'h c'hoazh eget he gwaz. « Ma savfe ur barrad-avel eus an douar e vefe brav din he gwelet bezañ gwintet dreist an tornaod ha mont war he fenn en dour, » emezon-me, didruez. Etre daou soñj e oan : o c'hunujennañ pe skeiñ mein warne d'o lakaat da vont kuit pa bellajont a-benn ar fin, dipitet-bras o soñjal ez eus tud oc'h ober korf rous e Kreisteiz Bro-C'hall hag int, paourkaezh, kollet er vrumenn en ur vro ouez ha distro.

Mont a ris etrezek plac'h he zelenn en-dro, mall war-non komz ganti. Ne oa ket aze ken. Spontet e oa bet gant an daou istrogell all, kredapl, ha tec'het e oa kuit. Ne zlefe ket bezañ pell avat. Ha me da redek betek tour Ó Brien, da furchal ennañ, en aner : den ebet. Kerzhet a ris a gammedoù bras dre ar geoteier. O steuziañ e oa al latar, toullet bec'h ha bec'h gant bannoù an heol. Kaer em boe sellet ha disellet ne welis na plac'h, na telenn, netra. Ne oa ket posupl, alato, da belec'h e oa-hi aet ? Diskenn a ris betek ar parklec'h. Ne oa nemet an daou C'hall repuget en o c'harr, sach-blev etreze. En dispi e teuis d'ar c'hleger en-dro. Aze e oa ur vran o tarnijal eus ur roc'h d'eben. Dont a reas da bradañ war ar badell. Ruz he figos hag he zreid, damalaouret he divaskell. Teurel a reas ur sell diwezhañ warnon gant he daoulagad wer-mouk hag e nijas kuit a-denn askell etrezek ar C'hornôg, etrezek ar bed all.

Chom a ris pell o heuliañ he nijadenn, da arvestiñ ouzh an dremmwel digatar. Savet e oa kuit al latar a-us d'ar mor glas. Pell e chomis d'he gortoz. Ne zeuas ket en-dro.

Meur a wech on distroet da dornaodoù Mhothair abaoe ar bloaz-se. Biskoazh ne 'm eus gwelet plac'h he zelenn en-dro. Kit da welet mar karit. Marteze ho po muioc'h a chañs egedon.

Al Liamm, niv. 338, 2003

Evel ur marc'h d'ar pevarlamm

Owain a oa dale bras gantañ da vont d'ar skol ar mintin-se. Re ziwezhat e oa evit gellout mont gant an hent naou-dinaou, digompez ha meinek, a gase d'ar vourc'h. C'hwec'h kilometr a oa d'ober, eus an ti-soul ma oa o chom gant e dud, betek ar skol. Pemp kilometr hepken, plaen ha kompez, ma yae dre an draezhenn. Ne oa ket da dortal ken : troet e oa al lanv. Kroget e oa da vale en ur astenn e gammedoù pa santas an dour dindan e dreid. Pelloc'h e oa ur strizhenn war an aod-vev etre ar mor hag an tornaod. War-bouez nebeut e vefe re uhel ar mor eno evitañ da c'hellout tremen. Tennañ a reas kuit e votoù hag en em lakaat da redek war an traezh. Buanoc'h-buanañ, evel ur marc'h d'ar pevarlamm, e redas betek ar strizhenn ha dont a reas a-benn d'he zreuziñ, dres pa oa savet an dour a-us d'e zaoulin. Justik ! Kenderc'hel a reas da redek, war e bouezig, foetet e zremm gant an avel-vor. Bep a vare e sanke tizh en-dro, betek dianaliñ. Nag ur blijadur ! C'hwez holl e oa, gleb-dour-teil betek an dargreiz, met ne verne ket, skañv ha laouen e oa e galon. Klevet a reas kloc'h ar skol o seniñ. Ur sprint c'hoazh hag erruet e oa, d'an eur rik ! War-lerc'h

an devezh-skol e tistroas d'ar gêr dre an draezhenn, en ur redek adarre, ha kement-se a reas hogos bemdez-c'houloù diwar neuze, da vintin ha d'an abardaez.

Stouet e gorf, e zaouarn war e zaoulin, e oa Owain o kemer e anal. Pa savas e benn e welas an eil reder o treuziñ al linenn degouezh. Ur wech c'hoazh e oa aet ar maout gantañ. Ne oa den evitañ e Kembre er redadegoù hir. El lise en doa kemeret perzh en e gevezadegoù kentañ ha diouzhtu e oa en em gavet e-touez ar re wellañ. Dre berzh e zisoc'hoù skol ha sport en doa bet ur yalc'had studioù evit mont da skol-veur Kerdiz. Gant e vloavezh kentañ e oa ha war gresk e yae e atapi ouzh ar c'hevezadegoù. Dibabet e oa bet evit redek ar 5 000m er c'hampionad etre ar skolioù-meur, aozet e Londrez e dibenn miz Even. Mall a oa warnañ c'hoari ouzh ar Saozon !

Aes e voe dezhañ tizhout ar gourfenn ha kregiñ a reas gantañ evel boas, o kemer penn ar redadeg. Buanaat a reas tamm-ha-tamm ken ma strewas an duilhad. Ne chome nemet daou reder saoz gantañ met kaer en doa sankañ tizh ne zeue ket a-benn d'o diskrogañ. Pa sonas ar c'hloc'h da gemenn an dro ziwezhañ e argadas c'hoazh, en aner : chom a rae an daou Saoz peg outañ evel div vrennigenn ouzh o roc'hell. El linenn enep e santas ar skuizhder o sevel en e zivhar. Poan en doa en e zivorzhed, evel pa vijent o poazhañ, ha deuet berr e oa e anal gantañ. Dres d'ar poent-se e argadas an daou Saoz. Ne c'hellas ket mont d'o heul. E-kreiz ar c'horn-pleg diwezhañ e tremenas ur reder all dirazañ, hag unan all c'hoazh a-raok al linenn degouezh. Kerkent ha treuzet anezhi e taoulinas hag e stouas e benn betek stekiñ e dal ouzh al leur, berr warnañ evel ul louz. Pempvet hepken ! Dipitet-bras ha